



CHANSON NEVEZ

*Composet etre daou Zen Yaouanq, desolet gant
an displijadur dre valiç ar goal deodou.*

V ar eun ton agreabl.

MA vijen bet partajet demeus ar sqientchou,
Em bije ar c'henta choas demeus al loden-
nou;

Me vije bet eloqant, prudant, melodius,
Hac a raje va c'haret hep triumphou Venus.

Mes Doue carantezus ha leun eus a buissanç,
A ra m'en em gonsolàn en creiz an ignoranç;
Rac ar sperejou izel bepret a vo meulet,
Herves ma lar ar Scritur, en pales an Drindet.

Me zo unan anezo, o poursu va' vantur,
A fell dìn e bep quartier cavout va flijadur,
Hac a za da vont bremâ bete ty va mestrez,
Da annonç dei carantez, grêt e meus alies.

Salud, fémelen yaouanq, deut oun c'hoas ho pete,
Eus ac'handon va unan me guemer liberte
Da renta dèc'h eur zalud gant peb affection,
Ha mar bec'h dìn infidel, e ranno va c'halon.



Ha d'êc'h-u, pareillamant, tenzorier va c'halon,
Me zo eur vinorezic lêzet en abandon :
Hanval demeus eur c'haptif-laquet en esclavach,
Cunduet gantar gêir dorn demeus ho personach.

Meulet ra vo an astrou ebars er firmamant ;
C'hoi.annonç din eur galon hac am rent triomphant ;
Hanval demeus eur c'haptif laquet en liberte,
Goude beza exilet en durant e vue.

Ma vije bet em pouvoar, credit, va gêir vignon,
N'ho pije bars er bed-mâ nep desolation ;
Mes me a bet va Doue, pa ne ma em pouvoar,
D'ho renta bars er bed-mâ vel an Aêlez er gloar.

Mam bije egalite vel ar Cherobinet,
Eur muzellou en arc'hant hac eun teot alaouret,
Pe autramant ar pouvoar en d'oa Alexandri,
Furnez evel Salomon dign evit ho meuli.

Me ho ped va zervicher, chenchomp a breposiou
Ha deut ganén da bourmen, e jardin ar goal deodou,
Hac eno c'houi a velo transplantet eur boquet :
Alies dirac va zud eo bet represantet.

Deomp eta, va mestrezic, da bourmen hon daou,
Evit ma considerin jardin ar goal deoudou ;
Hanyal eus an drouc-amzer e fleur ne dint qet guyé,
Rac n'en dint qet arrozet gant ar glizen an eê.

Bremâ, p'hon eus causeet en comparêzonou,
Me a ya da expliqa ebars en bêr gomzou :
Lennet e zeo hor setanç ha poset an arrêt,
Din davarch en ho qever, d'in n'e qet permetet.

Ah! femelen direspët, coll a res da rêson :
Qemer brêma eur c'hieze da dreuji va c'halon,
Pa lemmes va slijadur, êchu din va bue,
Na chomîn mui er bed-mâ da zouffr extremite.

Me ho ped va zervicher, confortit ho calon,
Rac ezom hon eus hon daou a gonsolation ;
Rac me a zo obliget, abers ar güir Doue
Da zenti ouz an hini en deus autorite.

Pa zepant eus ar goal deod ar separation,
Me ho ped, va mestrezic, d'ober reflexion,
Ha me ya da explica ar pez a meus lennet,
Peguen bras punishment vit an teod milliguet.

Sônjit ebars en Sant Yau, bars en Apocalips,
E Sant Gregor, e Sant Paul, Doctoret an Iliis,
Hac o deus bet condaonet ebars en bêr amzer
Ar goal deodou da veza princet da Lucifer.

Clêvit an Theoloji, sperejou a gonsecanç,
Pa gomz deus a Sant Louis Roue bras eus a Franç,
Pa gommandez d'e vuguel dre e c'hourc'hemennou,
Da ober scouarn vouzar pa glêvje goal deodou.

Bars en eul levr ancien e meus güelet merqet
An ifern zo paveet a deodou milliguet ;
Hac an nep gant plijadur a deuyo d'o zelaou,
A vo eme ar Scritur, renqet en o mescou.

Pa deuy an Æl Raphaël var e deatr eun de,
Da zon an drompill fatât d'ober an assamble,
O clêfot ar goal deodou e yudal gant arrach,
E c'houlen n'a vijen bet var an douar biscoas.

Me deu da laret adieu da blijadur ar bed,
Hac a ya en eun dezert d'eur forest benaquet ;
Ho pezit sonj ac'hanòn, me ho ped, va mestrez,
Me deu da laret adieu dèc'h oll evit james.

Oh ! arrêtit, va mignon, ha bet compassion,
An daelou em daoulagat ha mantret va c'halon,
Me a bromet da Zoue dre an hano a le,
Birvigen ne vanqàn dèc'h eus a fidelite.


*Bars eun nebeudic amzer m'en em vel oblijet
Da disober eur sermant pelhini am boa grêt ;
Goneet oc'h eus va c'halon ouzòn c'houi zisposo,
Ha mar deut d'am dilezel, me c'houlèn va maro.*

Me ho ped, va mestrezic, bet consolation,
Ha laqit ho confianç ebars Roue an trôn,
Me a vo o servicher etre ma vîn er bed ;
Adieu ta, va mestrezic, qen vo'r c'henta güelet.

Me meus trapot eur pichon ebars em c'hroulaçou,
Ha crennet e ziou-esqel vit miret na niço ;
Ha m'en goulse e berc'hen dre eur güir amitie,
Me a leusqfe e bichon ebars en liberte.

Nep en deus grêt ar zon-mâ, zo eur speret dister,
Deux a Barros Plouzelambr, en bornic Loc-Miqel ;
Hac en deus-hi composet da dremen e amzer,
Dezàn ha d'e vestrezic a chom en Treduder.

FIN.



ANTRETIEN

ETRE DAOU ZEN YAOUANQ

VAR EUR SEPARATION VOLONTER.

Var eun ton charmant.

SELAOUIT oll, tud yaouanq, eur rêzon familier,
SAhenou eur speret izel zo o chomen Treguer,
Hac en deus ar volonte da zont da zisclêriàn
An tenor deus an amitie zo arruet gantàn.

Crénavoc'h calz eguet ar môr, primoc'h eguet an avel,
Brillantoc'h eguet an lân, douçoc'h eguet ar mel,
Eo chaden an amitie, pa ve parfetamant
Hac unisset a galon entre daou den yaouanq.

Rac se ta, goaset yaouanq pere a rên er bed,
Na laqit qet ho speret da re garout merc'hed ;
Rac gout ouzont ar sêçon da douch ar c'halonou
Mui eguet an doctoret gant o oll discoursiou.

Eun tamperamant goal douç o deveus ar merc'het,
Gant eur galon goal frajil, eun humor imparfet ;
O bisach a zo joaüs, ho daoulagad mignon,
Mes o c'halon zo traitour ebars e pep sêçon.

Me meus choazet eur vestrez, ar vrava femelen
A guement zo er c'hantou, nemet ma zeo bien ;
E merit, e zalanhou a zepant eus an eê,
Mes n'ellân mui e meuli : ar gloar zo da Zoue.

O lamier an devalijen ! da hano eo al Loar,
Te form ar blanedennou a rên var an douar,
Hac ec'h eus va oblijet dre va flaneden galet
Da zisober eur sermant pehini am boa grêt.

Me a ya da zisclêria eur separation,
Goude calz a garante etre daou güir vignon :
Ar femelen oblijet da zont da chench quartier,
Hac ar mal zo qen dalc'het na ell qet a ober.

Cetu ta ar femelen lêzet en abandon ;
Ha ramplisset e c'halon a zesolation,
E rencout n'em separi demeus e c'harante,
Model deus e slijadur, tenzor e amitie.

Allas ! eme'r femelen, me a vel bremâ sclêr
Ne meus qen var an douar netra nemet mizer.
Me na meus na tad, na mam o rên var an douar,
Ha muia tra am chagrin, na meus den hac am c'har.

Oll lapouset eus an êr, canit tout assambles
Gant eur music eloqant, vit ma clêvin ho mouez,
Ma ellin demeus ho pers caout consolation,
Pa zôn gant va servicher lêzet en abandon.

Sant Pêr, prinç an Ebestel ha porzier var an trôn,
Disqennet em c'habinet, roît din consolation,
Pe suppliit an ancou ma tenyo qent an heur,
D'am lemel deus ar bed-mâ pa ne meus nemet maleur.

Pa voa'r femelen yaouanq en desolation,
Ec'h antren n'e c'habinet ganti e güir mignon;
En eur dont d'e zaludi en deus bet goulennet
Petra ez eo ar sujet ma zeo qen contristet.

Ar Plac'h.

Me rent déc'h eur reveranç vel eun Æl eus an eê,
E mâ etro ho taouarn chaden va liberte;
Hanval ouz eur martolod trapet etre daou dour,
Ha ne zeus nemet Doue a ell rei dezàn sicour.

Ar Goas.

E pez féçon, Plac'h yaouanq, em he-me an alc'hoë
A guement a ranfermfe chaden ho liberte?
Rac ne ma qet em pouvoar, pa n'er meritàn qet;
Beza an dispansatour Rouanez ar merc'het.

Ar Plac'h.

Oh! excusit, den yaouanq, rac n'on qet eun objet
A dlefe beza hanvet Rouanes ar merc'het;
Evit beza caret dre eur güir amitie,
Ne deuit qet d'am godissa ha bet ouzin true.

Ar Goas.

Credit hardi, Plac'h yaouanq, en ho caràn parfet
Hep implija ar flambos gant Venus alumet;
Qent velfec'h ar rivierou o pignat d'o sourcen
Eguet biqen, va mestres, ac'hanoc'h na drahisfen.

Ar Plac'h.

Ret e zeo din finissa ha cessi da barlant,
Ho comzou, va mignon qer, am rent meurbet contaat:

Me deus da souheti d'êc'h ar bonneur parfetan :
Eur pried d'am bolonte ho qaro evel ma rân.

Ar Goas.

Pa rencompn'em separi, greomp a galon vad,
Qercoulz eo ober abred evel a ziveat.
Pa n'en domp qet destinet da veza priejou,
Chanç domp ebars er bed-mâ ha goude hor maro.

Ar Plac'h.

Me c'hoar ganén vel Adam er barados terrestr,
Pa voe difennet ountàn dibri frouez gant e Vestr;
Pa zigresq va liberte e cresq va antêtamant;
Ret eo en em separi ha bout bepret contant.

Ar Goas.

Felix, Hector ha Pompe, Abeillard hac Anton,
Ar patriarch Abraham hac ar fur Salomon,
Eu nobstant d'o oll sqient o deus renqet finissa,
Ha ni dle beza contant d'ober ar memes tra.

Nep en deus grêt ar zon-mâ a zo c'hoas den yaonanq,
Oajet a dri-uguent mis en tu-hont da dri-c'hant,
Hac en deus-hi composet en desolation,
Touchant eo ar c'halonou piqet gant Cupidon.

FIN.

E Montroulez, eus a Imprimeri LÉDAN.